

War Roudou ar Werc'hez Vari

KANTIG : MAMM JEZUZ, HOR MAMM

Ton : Mayet.

Komzou : F. Guéguen



Allegretto
Diskan

Mamm Je-zuz, hor mamm, mamm dreist an holl
 mam-mou, Hon dal-c'hit be-pred — bu-ga-le vi-
 -han — Dre andorn hor c'ha-sit be-tek porz an
 nen-vou Gant eun e-ne cho-met di-gail.
rit.
 har ha glan. — Ou-zo'hez e
 stag holl vu-hez hon e-ne A-da-lek der-
 vez hor c'ha-ni-di-gez, Be-tek an eur
 dous ma ve-limp e Dou-e, En-dro d'eo'h, o
rall.
 Mamm, ar Sent, an Ae-lez.

Aliou a-raok staga

An abadenn pedennou-man a vefe mat da ober e pep parrez da sul ar Basion pe d'eur sulvez all bennak. Plijout a ray ha frouezus e vezo evit an eneo. N'eo ket pedenn eur strollad nemetken e vezo houman met pedenn ar barrez a-bèz ; an holl a vezo pedet da zont : bugale, yaouankizou, tud en oad.

Ar pezh a zo merket 1 a c'hellfe beza lennet gant eur paotr yaouank-pe eur strollad paotred yaouank ; ar pezh a zo merket 2 gant eur plac'h yaouank pe eur strollad merc'hed yaouank ; ar pezh a zo merket « an holl » gant an holl en iliz.

Ar re a vezo karget da lenn a boanto da zistaga mat ha fraez ; trei a c'hellfent zoken war-zu traon an iliz evit beza entetet gwelloc'h.

Mat e vefe da gement hini a zeuto d'ar pedennou, kaout al leurig-man ; evelse e vezo aes d'an holl heulia.

Mat e vefe c'hoaz lakaat an dud da zaoulina ha da sevel en o sav tro ha tro ; diskuitzusoc'h a-se e vezo evito.

Dirak an Aoter Vras

Kantig : Mamm Jezuz, hor Mamm.

Diskan :

Mamm Jezuz, hor Mamm, mamm dreist an holl mammou,
Hon dalc'hit bepred bugale vihan ;
Dre an dorn hor c'hasit betek porz an Nenvou,
Gant eun ene chomet digailhar ha glan.

1. Ouzoc'h ez eo stag holl vuhez hon ene
Azalek dervez hor c'hanidigez
Betek an eur dous ma welimp e Doue
Endro d'eoc'h, o Mamm, ar Sent, an Aelez.
2. Pa darz goulou deiz, pa gouez ar pardaez-noz,
E par ho lagad war ho pugale
Mall ganeoc'h warno skuilh brokus ho pennoz
P'o gwelit en hent, aet skuiz o vale.
3. Pa lamm hor c'halon krenvoc'h ha buanoc'h,
Pa garomp Jezuz gant mui-oc'h a nerz,
N'eus ken kaoz nemet ho torn a zo tommoc'h
Hag ho karantez hon eus enni perz.
4. Pa gouezomp, siouaz ! e bouilhenn ar pec'hed,
Ho sell glac'haret a douch hor c'halon
Dour en daoulagad ha gwir geuz er spered,
Buan e savomp da c'houlenn pardon.

5. Ganeoc'h e teraou hag ganeoc'h ec'h echu
Amzer ar bed-man, prestet gant Doue...
Hep dale 'vo fin d'hon derveziou hariu
Hag e vezimp holl en eternite.
6. Mamm, chomit hor Mamm, e lez ar baradoz :
Bodet endro d'eoc'h, sent en ho kichen
Ho pugale ger a gano, deiz ha noz,
Gloar ha meuleudi d'o Mamm, da viken !

1. Salver Jezuz, — Doue leun a drugarez,
Deuet omp d'ho pedi — evit hor bro, hor bro gaez.
2. Dre galon ho mamm vat, — hor mamm hag hor skoazell
E kasimp davedoc'h, — hor pedennou santel.
1. Ra blijo ganti diskouez d'eoc'h — pegen bras eo ar glac'har,
[an anken,
Ar s'pont, an enkreiz, — a wash, en hor bro, kalon pep den.
2. Lavarit, ivéz, gwerc'hez dinamm, — hon eus keuz d'hor
[pec'hejou,
Hag e fell d'eomp, gant ho sikour, — heulia gwelloc'h ar gour-
[c'hemennou,
- 1-2. Salver Jezuz, — Doue leun a drugarez,
Roit d'hor bro eur vuhez nevez !

KENTA LODENN

Ar Misteriou a C'hlaç'har

(Evit al lodenn-man e c'hellfe al lennerien hag al lennerezed mont dirak eur groaz pe dirak skeudenn Itron Varia a druez. E-keit-se e vo kanet eur c'houlblad eus ar c'hantig.)

1. En ho kichen, Gwerc'hez Vari, — hor c'halonou leun a c'hla-
E kerzimp a spered — war hent menez Kalvar. [c'har,
2. E-pad ma chomimp da sonjal — er misteriou truezus
Grit ma vezimp dirazoc'h — gwir vugale karantezus.
1. Grit ma tougimp, — hep en em glemm an distera,
Hervez ar skouer a roit d'eomp, — samm hor poaniou kaleta.
2. Glac'harus meurbet — ez eo buhez an dud er vro, — en hor
[mare,
1. Grit ma feuint da blega — dindan dorn an aotrou Doue,
2. Ha da c'houlenn pardon,
Gant keuz leiz o c'halon.

(Aman eun dizenez-chapeled.)

Kantig :

Dallet oamp holl ha mezevet gant ar pec'hed
Hep aon na mez e torremp ho lezenn.
Ha ret 'vo c'hoaz d'ar brezel pe d'al luc'hed,
Diskouez ez eus eur Mestr a-zioc'h hor penn !

Diskan :

Truez, va Doue !
Hor c'heuz 'zo bras.
Savit hor bro hep dale } 2 w.
Ken uhel ha biskoaz !

I. — TREMENVAN JEZUZ

TON : *Stabat Mater.*

Jezuz pa wel o tont warnan
Samm holl bec'hejou ar bed-man,
A gouez a-stok d'an douar.

1. Eman poaniou ar Basion, — o koueza war ho Mab, — o Mari, mamm dener.
 2. E pelec'h edoc'h neuze, — Gwerc'hez santel ?
 1. E-pad m'eman war e zaoulin, — e dal ouz an douar, — gwasket ha flastret — dindan samm ar pec'hejou,
 2. E-pad ma c'houlenn — digant e Dad a zo en Nenv, — kaout truez outan,
 1. « Tad, mar deo ho polontez, — pellait diouzin ar c'halir-man ! »
 2. E-pad ma ruilh eur c'houezenn a wad, — hed-ha-hed e gorf,
 1. Pa glask eun tamm frealzidigez — e kichen e ebestel, — a gav gousket da vat, — pa dlefent beza chomet da bedi — a-unan gantan.
 2. C'houi, Gwerc'hez, — n'oa netra guzet ouzoc'h, — Doue pe sant Yann a zeske d'eoc'h — kement a dremene el liorz, — hag el lez-varniou.
 1. Judas o werza ho mab, — an ebestel o kemerout an tec'h,
 2. Ar soudarded o kregi e Jezuz, — Per o nac'h e vestr,
 1. Holl boaniou Jezuz, — e-pad e Basion, — a zo bet eur verzerenti — evit ho kalon.
 2. O Mari, mamm dener, — truez hon eus ouzoc'h.
- AN HOLL. — *O Mari, mamm dener, — truez hon eus ouzoc'h.*

1. Ni a c'houlenn pardon, — evit ar pec'hejou hon eus graet.
 2. Goulennit — ma vezo pardonet he fec'hejou d'ar Frans.
- AN HOLL. — *Goulennit — ma vezo pardonet he fec'hejou d'ar Frans.*
1. Eman d'he zro en he zremenvan,
 2. Kablus eo, a dra sur, — met gwelit pegement e rank gouzanv.
 1. Mari, mamm vat, — roit ho skoazell d'ar re a zo war-nes koll kalon,
 2. Hag a gav tenn c'hoaz lavarout : — Bolontez Doue bezet graet !
 1. « Bolontez Doue bezet graet, — ha nann hor bolontez d'eomp-ni ! »
- AN HOLL. — « *Bolontez Doue bezet graet, — ha nann hor bolontez d'eomp-ni !* »

II. — JEZUZ A ZO BARNET D'AR MARO HA SKOURJEZET

TON : *Stabat Mater.*

Pilat en deus gourc'hemennet
Ma ve Jezuz gwall-skourjezet
Daoust ma kred eo didamall.

1. Ho mab, Gwerc'hez Vari, — a zo lakaet e renk eun torfetour.
 2. Stlejet e vez didruez — eus an eil lesvarn d'egile.
 1. Gant Kaifas eo bet barnet, — gant Erodez dismeganset.
 2. Gant aon da goll e garg, — Pilat a varn Jezuz d'ar maro.
 1. Kleze ar seiz glac'har, — hervez lavarou an den santel Simeon, — a ya dounoc'h-douna en ho kalon, — dre ma teu d'eoc'h ar c'heleier.
 2. O Mari, mamm dener, — truez hon eus ouzoc'h.
- AN HOLL. — *O Mari, mamm dener, — truez hon eus ouzoc'h.*
1. Rannet eo bet ho kalon — gant ar youc'hadenn-man : — « Ne fell ket d'eomp — e teufe Hennez da veza hor Roue ! »
 2. « Stagit-Hen ouz ar groaz, — ha ra gouezo e wad warnomp-ni, — ha war hor bugale. »
 1. Touellet gant mistri fallakr, — e c'houlenn ar Yuzevien ma ve staget ouz eur groaz, — o Roue hag o Salver.
 2. Kemend-all, siouaz ! — hon eus gwelet ha klevet e Frans, hag e Breiz.
 1. Merc'h hena an Iliz, — savetaet dre vurzud, — gant Klovis e Tolbiak, — gant Charles Martel e Poitiers,
 2. Gant santez Jan d'Ark, — e Orleans.
 1. Bro-Frans, — evel ma lavare Jan d'Ark, — a zo gwir rouantelez, ho mab Jezuz.

2. Dre volontez ar roue Loiz XIII, c'houi a zo deuet da veza rouanez ar vro.

AN HOLL. — *Jezuz a zo he roue, — ha c'houi, Mari, he gwir rouanez.*

1. Met, siouaz — evel ma reas pobl Israel gwechall, — Bro-Frans he deus nac'het he Mestr, — ha graet brezel da Zoue.

2. Hag e Breiz, — meur a gristen en deus graet kemend-all.

AN HOLL A GAN

TON : *Kalon Dinamm Mari.*

Betek e Breiz-lzel
Gwechall Bro ar Sent
Ouz an Iliz santel
Kalz a chom disent. Ave...

1. « Ne fell ket d'eomp — e ve Hennez hor mestr ! »

2. Ha setu m'o deus klasket — lakat Doue er maez !

1. Er maez eus ar skoliou, — er maez eus ar familhou, — er maez menec'h ha leanezed ! — Er maez kroaz benniget ! — Ha bugale a vilionou — o deus ranket kreski — hep anaout lezenn-Doue.

2. Breman e welomp petra a zo c'hoarvezet, — ar pezh a dlee c'hoarvezout : — an dud, deuet da veza difeiz — ne glaskont nemet o mad o-unan.

1. Pep-hini a red warlerc'h ar plijadurioù ; — ne glever mui mouez ar goustians. — Mont a ra an dud war fallaat — o tec'hout diwar roudou o zud koz.

2. Eur brezel a zo bet digoret, — ha ni a zo bet trec'het : — ha setu ma kaver, dre holl, — dismantrou, tud e kanv, tud glac'haret.

1. « Ra gouezo e wad warnomp-ni, — ha war hor bugale, » — a lavare ar Juzevien, — dallet gant ar gasoni. — A ! ma karfemp, da vihana, — klask kompren ar gentel roet d'eomp, — gant madelez an aotrou Doue !

2. Hen anzav a rankomp, — bras ha niverus eo bet pec'hejou tud hor bro. — Ma teuont da ziskouez kaout keuz, — e vezint pardonet !

AN HOLL. — *Ma teuont da ziskouez kaout keuz, — e vezint pardonet !*

1. Pilat alavaras — n'oa ket eun tamall da ober da Jezuz. — « Ne gavan netra, emezan, — da rebech d'an den-man. »

2. Daoust da se — e ro urz d'ar soudarded — da skei warnan gant o skourjez.

1. Sentus evel eun oanig, — Jezuz a lez ar soudarded da ober o fenn ; — an taoliou a gouez war e gorf noaz, — niverus e tigor ar gouliou, — ar gwad a strink a bep tu, — ar soudarded a gen-dalc'h da skei.

2. Ar fouetou a lez war gorf Jezuz, — roufennoù ruziet gant ar gwad, — hag a freuz ho kalon a vamm — eun tamm muioc'h bep taol.

1. Perak e lez ar soudarded da vont gant o labour, — labour tud digalon ?

2. Dre 'n abeg ma fell d'ezan — paea evit hor pec'hejou, — pec'hejou mezus an den.

1. Ha deski d'eomp — penaos e ranker ober pinijenn, — ha lakaat ar youlou fall da blega.

2. Tud hor bro, — re zouget da ren eur vuhez didrabaz hag eürus, — en em leze da vont, — hag a ziskenne, tamm-ha-tamm, izeloc'h bemdez.

1. Betek m'eo deuet Doue d'o skourjeza, — gant eur wialenn houarn. — Abaoe pevar bloaz, e kouez an taoliou warno.

2. An dud n'oant ket direbech, sur eo, — koulskoude, o mamm vat, sellit, — eman o gwad o ruilh.

1. Sellit ouz hor c'hèriou dismantret, — ouz an dud lazet bemdez.

AN HOLL. — *Sellit ouz hor c'hèriou dismantret, — ouz an dud lazet bemdez.*

2. Grit, o Gwerc'hez Vari, — ma paouezo justis Doue d'hor c'hastiza, — sonjit e kement hoc'h eus gouzanvet, — pa gouezo an taoliou skourjez — war ho Mab muia karet.

TON : *Patronez dous ar Folgoad.*

Patronez hor bro garet,
Hor mamm hag hon itron,
Ho pugale glac'haret,
A zeu da glask pardon,
Grit eur sell a drugarez
Ouz hor bro gwalleürus,
Ha lakit dre vadelez,
Fin d'ar brezel euzus.

III. — JEZUZ KURUNET GANT SPERN

TON : *Stabat Mater.*

Bodou spern 'zo bet kroazellet
War benn ho mab muia karet
Dre zismegans tud fallakr.

1. Korf ho Mab, o Gwerc'hez Vari, — a zo dispennet gant an taoliou ; — ar gasoni-iferen a vroud ar c'halonou — a lavar n'eo ket awalc'h c'hoaz.

2. Ha setu ma klasker eur verzerinti all. — Soudarded Pilat, — evit kaout berroc'h o amzer, — a stag da ober goap ouz Jezuz.

1. « An den-man en deus diskleriet e vije roue, — « Kinnigomp d'ezan merkou e garg nevez.

2. « Setu eun tamm skabell, — mat eo da veza eun tron a-zoare.

1. « Gant an truilhou-man — e raïmp eur vantell gaer da c'ho-lei e ziskoaz.

2. Ar gorzennig-man — a vezo eur vaz-roue eus an dibab en e zorn.

1. Ha peogwir e rank eur roue — dougen eur gurunenn, — sankomp en e benn an tammou spern-man — kroazellet mat. »

2. Hag ar soudarded da ober goap, — da lavarout komzou flemmus, — « Salud, roue ar Juzevien ; — lavar d'eomp gant piou ez out bet skoet. »

1. E petra e sonjec'h, o mamm, — pa zispleged keiment-man dirazoc'h ?

2. E komzou an arc'hael Gabriel, moarvat, — pa gemenne d'eoc'h — e vije ho mab roue da viken.

1. « Azeza a ray war gañor ar Roue David, — « Ha ne vezo fin ebet — d'e c'halloud a roue. »

AN HOLL. — *Ha ne vezo fin ebet, — d'e c'halloud a roue.*

2. Hogen ar vrasa dismegans a welit o tont — e-lec'h an enor-prometet. — Daoust da se, Gwerc'hez feal, — ho feiz a chom start ha divrall.

1. Rouanez hor bro, — dirak an dismegansou hon eus da c'houzanv, — grit ma chomo birvidik hor fizians — e braster da zont hor bro garet.

AN HOLL. — *Grit ma chomo birvidik hor fizians — e braster da zont hor bro garet.*

Ton : *Attende Domine.*

Evit hor bro, Jezuz, ni c'houlenn pardon,
Gwir geuz a sav en hor c'halon.

IV. — JEZUZ O TOUGEN E GROAZ

Ton : *Stabat Mater.*

O pignat war menez Kalvar
Teir gwech e kouezas d'an douar,
Dismeganset gant ar bobl.

1. Eman deuet evidoc'h, o Gwerc'hez Vari, — ar mare da vont da heul ho mab, — ha da ginnig gantan e sakrifis war ar menez.

2. Degaset eo bet ar groaz, — sammet eo bet war e skoaz, — Eman breman o kemerout penn-hent ar c'halvar.

1. Stummet oa bet dre e vicher a galvez — da loc'h ha da zou-gen tammou koad pounner.

2. Hirio, avat, n'hell ket bale mat, — re a wad en deus kollet ; — krena a ra war e zivesker, — koueza a rank : — ret eo mont war e sikour.

1. An taoliou skoet gantan, o mamm, — a glevit en ho kalon.

AN HOLL. — *An taoliou skoet gantan, o mamm, — a glevit en ho kalon.*

2. Eur vaouez bennak, koulskoude, — a ziskouez kaout truez outan. — Unan anezo a gred dont da sec'hi e zremm divin.

1. Ni 'garfe, o mamm glac'haret, — ho frealzi d'hon tro, — en eur veza, hed hor buhez, — ar Sirenean madelezes, — en eur ober, d'hon tro, — ar pez a reas santez Veronika.

2. Emaomp, ivez, Gwerc'hez Vari, — o pignat war menez ar c'halvar.

1. Pevar bloaz a zo e tougomp eur groaz pounner.

2. Ne welomp fin ebet d'hor poaniou, — bemdez e teuont da veza krisoc'h,

1. Poaniou eul labour re galet, — evit ar merc'hed a labour ar parkeier,

2. Poaniou ar gortoz, — evit ar re eo prizoniet o gwazed.

1. Poaniou an tadou, ar mammou — a glev o bugale o c'houlenn bara.

2. Poaniou an dud o deus ranket mont kuit, — kollet ganto pep tra.

1. Poaniou ar brizonerien, — a goll o nerz-kalon du-hont.

2. Poaniou ar re a rank mont da labourat — pell diouz o zud.

1. Poaniou ar mammou, — ar priejou kollet o zud ganto.

2. Hag an holl boaniou a bep seurt — a gouez bemdez war hor bro.

1. O Gwerc'hez Vari, — grit ma kavimp nerz a-walc'h da c'houzanv hor poaniou.

AN HOLL. — *O Gwerc'hez Vari, — grit ma kavimp nerz a-walc'h da c'houzanv hor poaniou.*

2. Astennit ho torn, — d'ar re a welit o fallgaloni, war an hent, — o sonjal en ho mab, — a gouezas teir gwech war hent menez Kalvar.

1. Kreskit fizians ar re a welit en disesper.

2. Sikourit hor bro, — breman p'eman o tougen eur groaz pounner.

AN HOLL. — *Sikourit hor bro, — breman p'eman o tougen eur groaz pounner.*

Ton : *Attende Domine.*

Evit hor bro, Jezuz, ni c'houlenn pardon,
Gwir geuz a sav en hor c'halon.

V. — JEZUZ A VARV OUZ AR GROAZ

Ton : *Stabat Mater.*

Penaos e chomit, o Gwerc'hez
En ho sav war lein ar menez
E kreiz eur boblad tud kriz ?

Ouz ho kwelout, gwerc'hez Vari,
E c'houlennomp kaout kasoni,
Ouz ar pec'hed milliget.

1. Mamm-beuzet en ho klac'har, — hag a chom koulskoude en ho sav, — eman ho mab, Jezuz, o paea dle ar bec'herien.

2. Kement a ra poan d'ezan — a ra poan d'eoc'h, ivez.

1. Didrouz e red ho taelou, — ne savit ket eur glemmadenn.

2. Ne lakit ket ho malloz da goueza — war vourevien Jezuz, — rak, an dud-man, — n'int nemet mevelien justiz an aotrou Doue.

1. D'an deiz m'hoc'h eus lavaret « ya » — da gannad Doue, an arc'hael Gabriel, — hoc'h eus degemeret a galon vat — kement tra ho piye da c'houzanv, — evit sikour savetei an dud, war an douar.

2. E-tal ar groaz — hoc'h eus bet ar vadelez da lavarout adarre : — « Ra vezo graet bolontez Doue — E servicherez oun-me ! »

1. N'edoc'h ket hep gouzout — e falveze gant ho mab mervel — evit ma c'hellfe an den — tizout ar vuhez peurbadus.

2. Dre ar c'homzou — lavaret gant Jezuz da sant Yann : — « Mamm setu ho mab », — ar gristenien a zo deuet da veza ho pugale.

1. Deuet int, ivez, — da veza breudeur Jezuz.

2. Dalc'hit sonj eus ar poaniou — hoc'h eus bet da c'houzanv, gwechall, — ha kemerit truez — ouz ar merc'hed, ar priedou a welit e kanv, breman.

AN HOLL. — *Ha kemerit truez — ouz ar merc'hed, ar priedou a welit e kanv breman.*

1. Ho mab hoc'h eus sikouret — e-pad m'oa stag ouz ar groaz, — bezit breman — mamm vat ar re a zo er boan, du-hont.

2. Bedit mamm ar re a zo klanv, — ar re a zo o vont da vervel, — peil diouz o zud, — ha peil diouz o bro.

1. Bedit nerz ha frealz o mammou, — o friejou.

2. Goulennit ma vezo pardonet — d'ar re en em sav enep Doue.

1. Grit ma teuimp holl da ober, a galon vat, — pedenn al laer dehou, gwechall : — « Ma rankomp-ni gouzanv poan, — mat eo, — rak droug hon eus graet. »

2. Grit ma teuimp a-benn, — dre hor poaniou degemeret mat, — da c'hellout ober pinijenn wirion, — ha da c'hounit ar baradoz.

1. Grit ma talvezo hor poaniou — da vrasa mad ar vro.

AN HOLL. — *Grit ma talvezo hor poaniou — da vrasa mad ar vro.*

2. Gwerc'hez Vari, — deskit d'eomp lezenn gaer ar Redamsion, — deskit d'eomp gouzanv hor poaniou — hep en em glemm.

1. Hent ar groaz eo hent ar baradoz, — evit an den.

2. Hent ar rezureksion, an adsao, — e vezo, ma karomp, evit ar vro.

AN HOLL. — *Hent ar rezureksion, an adsao, — e vezo hent ar groaz, evit ar vro.*

Ton : *Attende Domine.*

Evit hor bro, Jezuz, ni c'houlenn pardon,
Gwir geuz a sav en hor c'halon.

(*Eun dizenez-chapeled.*)

UNAN (*eur beleg*). — Emaomp o paouez mont da heul ar Werc'hez, — a spered, a galon, — hed-ha-hed ar misteriou truezus — a gaver en he buhez. — Chomomp a-unan ganti, eur pennadig all, — ha greomp eur sell leun a feiz, a esperans, a garantez, — war ar misteriou glorius.

War denvalijenn gwener ar groaz, — ez eo deuet heol mintin-vez ar sul Fask da bara, — ha da strevi eur splannder dispar. — Diwar boaniou an amzer-vreman, — gouzanvet en eun doare kristen, — e savo, ivez, — eun amzer-da-zont gwelloc'h, kaeroc'h, — evidomp, hag evit hor bro... — Hadomp, er boan, danvez eun eost mat!

En eost, ne zastumer — nemet eus an ed a vez bet hadet ; — evel-se an neb a ra oberou fall, — ne gavo nemet breinadurez ha maro ; — an neb a ra oberou mat, — ouspenn ma teu da veza eur salver, — a gavo ar vuhez a bado da viken.

EILVET LODENN

Ar Misteriou a C'hloar

(*Evit al lodenn-man e c'hellfe al lennerien hag al lennered mont dirak eur skeudenn eus ar Werc'hez en he gloar, skeudenn I-V. a Lourd, lakomp.*)

I. — TREC'H D'AR MARO

Ton : *O filii.*

Da vintin Pask, leun a vuhez

Eo savet Jezuz eus ar bez,

E welet hoc'h eus c'houi, gwerc'hez,

Skedus ha krenv.

Diskan (e lec'h alleluia) :

Mari o mamm garet Jezuz,
Pedit 'vidomp.

1. P'edo an traou en o gwas, Mamm vat, — n'hoc'h eus keñ kollet fizians.

2. Gouzout a raec'h e savje eus ar bez, — hervez m'en doa bet lavaret.

1. Ar sul Fask a zo bet evidoc'h — sul ar gwir levenez, — a dal m'eo deuet Jezuz — gant merk gouliou e gorf, — lintrus evel perlezennou, — d'en em ziskouez d'eoc'h.

2. N'hell mui kaout poan, — n'hell mui mervel, — bezit laouen, eta, o mamm, — goude kemend-all a drubuilh.

AN HOLL. — *Bezit laouen, eta, o mamm, — goude kemend-all a drubuilh.*

1. Ni, ho pugale, a zo c'hoaz — war hent kalet ha striz ar c'halvar, — daoust d'eomp beza karet mat ganeoc'h, — en despet d'hor pec'hejou.

2. Darn a gred hag a lavar — n'hellimp mui en em sevel, — ha kemeret adarre hor renk gwechall — e-touez poblou ar bed.

1. Met sonj hon eus — e lavaras Jezuz ar c'homzou-man diwar-benn Lazar : — « Kousket eo va mignon Lazar, — emañ o vont d'hen dihuna. »

2. Daoust d'ezhi beza klanv ha gwall c'hloazet, — hor bro a gavo, eun deiz, ar pare. — Dihunet e vezo.

1. Pa welit hor bro gwasket — dindan samm he foaniou, kastiz he fec'hejou, — goulennit digant ho Mab kaout truez outi, — ha pardoni d'he bugale.

2. Ha gwalc'het gant dour daelou hor pinijenn, — e teuimp da veza tud all, — mall ganto bale war gwir hent ar vuhez.

1. Hon amzer da zont — a zo etre daouarn an dud yaouank.

2. Tud yaouank fur, — yac'h o spered, glan o c'halon, — a gavo gwelloc'h mont d'o labour — eget d'an ebatou, — ar re-man, hag ar re-man hepken, — a c'hello savetei ar vro.

1. Gwerc'hez Vari, — grit ma vezo an dud yaouank, tud leal ha kalonek.

AN HOLL. — *Gwerc'hez Vari, — grit ma vezo an dud yaouank, tud leal ha kalonek.*

TON : *Regina caeli.*

Rouanez an neny 'zo laouen, alleluia.
Jezuz ar mab he deus bet da zougen, alleluia,
A zo breman leun a vuhez, alleluia,
Pedit evidomp, Gwerc'hez : alleluia.

II. — JEZUZ O PIGNAT EN NENV

TON : *O filii.*

Lavaret gantan kenavo,
Jezuz a bignas d'e wir vro
Ouz hor gortoz eman eno
'Kichen e Dad.

Diskan (e lec'h alleluia) :

Mari, o Mamm garet Jezuz,
Pedit 'vidomp.

1. Mari, mamm santel, — eman ho Mab o vont d'ho kuitaat, — eur wech c'hoaz.

2. Pignat a ra d'an Nenv, — skedus evel an heol.

1. Eman o tistrei da gaout e Dad, — peurc'hraet e labour gantan.

2. Ho lezel a ra gant ar gristenien genta, — eur vamm vat e vezoc'h evito, holl.

1. Chom a reoc'h e-touez an ebestel, — o deus bet ar garg — da gas kelou mat an aviel — betek penn pella ar bed.

2. Meur a vloavez e chomoc'h war an douar — pell diouz ho Mab.

1. Tenn e kavit an disparti, — met sentus bepred, — ne fell d'eoc'h, adarre, — nemet plega da volonteaz an Tad a zo en Nenv.

2. Gouzout a rit ervat eman Jezuz er baradoz, — leun a c'hloar, — hag e teuy d'ho kerc'hat — pa gavo e vo deuet ar mare.

1. Hag e c'hortozit ar mare-se, — hep en em glemm.

2. E-kreiz an trubuilhou — a zeuy c'hoaz d'hon enkrezi, — deskit d'eomp — sellout gant fizians ouz an Nenv, — Gwerc'hez Vari.

1. Grit ma kredimp startoc'h c'hoaz — e kavimp er baradoz — an digoll eus holl boaniou ar bed-man.

2. Kemerit truez — ouz ar re a gred n'eus ken eürusted, — nemet an eürusted a gaver aman, — war an douar.

1. Kemerit truez ouz ar re a ouel, — ha n'o deus ket a feiz.

AN HOLL. — *Kemerit truez ouz ar re a ouel, — ha n'o deus ket a feiz.*

2. Evidomp-ni, — diazezet mat hor feiz war gomzou Jezuz, — a gred e kavimp er baradoz, — an dud a garomp.

1. Hag e c'houlennomp ma vezo frealzet en nenvou, — ar re o deus bet poan.

AN HOLL. — *Hag e c'houlennomp ma vezo frealzet en nenvou, — ar re o deus bet poan.*

2. War an tachennou emgann, — er c'hêriou diskaret, — dismantret.

1. Ar re a zo marvet pell diouz ar vro, — pe en eur prizon bennak,

2. Ar re a zo lazet tamm-ha-tamm — gant an enkreiz, an naon,

1. Ar re a zo er boan, — pe a rank mervel, — hep beza kablus.

2. Ra zeuy sonj ar baradoz — da rei d'ezo nerz kalon.

AN HOLL. — *Ra zeuy sonj ar baradoz — da rei nerz kalon d'ezo.*

Setu an amzer nevez

Buan



Ka . naou . enn hor yaou . an . kiz a zav be .



pred, e . vel ar mo . ged, 'tre . zek an neñv a



sked, eur c'he . lou 'zo ski . gnet, an holl deus e




gle . vet 'Vit an am . zer da zont, Holl war



zao hag hep spont. La . bou . rer gwask . et gant ho




trubuilh . ou bemdez, Em . gle . viou kris . ten 'zi . gas



Diskan

d'eo . ch le . ve nez 'Vit an holl le



ve . nez, Set' an am . zer ne . vez, ni 'la



bou . ro be . pred 'vit ar C'hrist, mestr ar bed.

III. — AR SPERED SANTEL O TISKENN WAR AN EBESTEL

Ton : O filit.

Ar spered santel a ziskenn
War dal ar c'henta kristenien
Evit senti ouz ho pedenn
Gwerc'hez Vari.

Diskan :

Mari, o Mamm garet Jezuz,
Pedit, 'vidomp.

1. A-raok mont kuit, — Jezuz a lakeas an ebestel dindan ho skoazell, — evit ma teufent gwelloc'h a se — da ober o labour eun deiz.

2. Er gambrlid e pedit ganto, — Gwerc'hez Vari,

1. Goulenn a rit — ma teufe ar spered santel — da rei eun doare nevez d'ar bed.

2. Eun tan burzudus — a ziskenn warnoc'h eus an Nenv, — deuet da veza teodou tan — e teu da en em sila en ebestel.

1. Ha kerkent eo deuet ar re-man — da veza tud dishenvel.

2. Breman e komprenont mat — kenteliou o mestr.

1. Aonik dec'h, — n'o deus breman aon rak den ebet.

2. An testeni o deus da rei — a vezo roet, — n'eus fors penaos e vezo klasket an tu — da ober d'ezo rei peoc'h.

1. Eman diazezet mat — Iliz hor Salver Jezuz-Krist, — ha c'houi, Gwerc'hez, — eo Rouanez ha Mamm an Iliz-man, da viken.

AN HOLL. — *Ha c'houi, Gwerc'hez, — eo Rouanez ha Mamm an Iliz-man, da viken.*

2. Da viken e vezoc'h rouanez an Ebestel,

1. Rouanez ar re a glask beza gwir gristenien.

2. Rouanez ar re a ya da embann an aviell — d'ar broiou pella.

1. Rouanez ar visionerien — a vez e-touez ar bayaned.

2. O Mamm vat, — dalc'hit sonj hon eus-ni roet kalz misionerien, — muioc'h zoken eget ar poblou all.

1. Hon tadou koz a zo bet o tifenn bez ho Mab.

2. Ni siouaz ! — meur a vloavez a zo — hon eus degemeret gevier — ha kredennoù fall eur bern fals-doktored.

1. Dec'h e kasemp misionerien dre-holl, — ha breman e teuomp da veza eur vro — o koll he feiz kristen.

2. Ha koulskoude — n'eo ket an dud vat a ra diouer d'eomp.

1. Rouanez an Ebestel — goulennit digant ho Mab degas ar Spered-Santel — da garga kalonou ar gristenien leal, — evit ma krogo enno tan ar garantez, — evit Doue hag an nesa.

2. Grit ma kresko war douar hor bro — niver ar veleien santel,

1. Grit ma chomo Bro-Vreiz, Bro ar Feiz.

2. Gwerc'hez Vari, rouanez an Ebestel, — goulennit evidomp ar c'hras — da veza gwir ebestel ar maeziou.

AN HOLL. — *Goulennit evidomp ar c'hras — da veza gwir ebestel ar maeziou.*

(Eun dizenez-chapeled.)

IV. — AR WERC'HEZ DOUGET D'AN NENV

TON : O fitti.

Deuet amzer an tremenvan
Evit ho korf ken kaer, ken glan.
Douget gant an aelez a gan
E pign d'an Nenv.

Diskan :

Mari, o mamm garet Jezuz,
Pedit 'vidomp.

1. Gwerc'hez ha mamm, — eman deuet evidoc'h an eur da reseo ho kurunenn, — ha da vont da danva eul levenez hep he far.

2. Eman deuet ar mare — da vont da welout ho Mab 'mtiia' karet, — ha da chom en e gichen — er baradoz da viken.

1. Hoc'h ene a nij d'ar baradoz, — evel anezan e-unan. — Ar maro evidoc'h n'eo nemet fin eun harlu.

2. Ni, avat, a gren dirak ar maro, — mab ar pec'hed — Santez Mari, mamm-Doue, — pedit evidomp da eur hor maro.

AN HOLL. — *Santez Mari, mamm-Doue, — pedit evidomp da eur hor maro.*

1. Grit ma vezo maro pep-hini ac'hanomp, — henvel ouz ho maro d'eoc'h-c'houi.

2. Grit d'eomp mervel e karantez Doue.

1. Ho korf hag a zegemeraz mab Doue en em c'hraet den — n'helle ket, evel korf pep den, — chom da deuzi en eur bez.

2. Douget eo bet d'an Nenv, — skedus evel al loar.

1. En-dro d'ho korf — an aelez a gan meuleudi d'o Rouanez.

2. Ho pugale, chomet war an douar, — a drid gant al levenez.

1. E'trus int, hag e kanont mil meuleudi — d'o Mamm a zo en Nenv.

2. Tud hor bro-ni o deus graet eun dervez gouel, — eus an deiz m'eo bet douget — korf o Mamm d'ar baradoz.

1. Bep bloaz e vez graet enor bras — da « Itron Varia Hanter-Eost », — hag en hor bro eo e lider ar c'haera goueliou.

2. Gwelit ar chapeliou, an ilizou — hag a zoug an anoïou dudiusa — a zo bet roet d'eoc'h a-hed ar c'hantvedou !

1. Ne anvimp aman nemet unanig bennak — eus ar re a gavomp hed-ha-hed hor maeziou, — e Leon, Treger ha Kerne.

2. Patronez dous, Itron ar Follgoad, — selaouit hor pedenn.

AN HOLL. — *Evel Salaün, o Maria,*

Ni a c'houlenn hor bara.

1. Itron Varia, Ker an Itron, — selaouit hor gouenn.

AN HOLL. — *Gwerc'hez Vari, kreskit ar feiz.*

E pep parrez eus hor Breiz !

2. Itron Varia Ru-Maen-Goulou, — degasit d'eomp peoc'h ha yec'hed.

AN HOLL. — *Itron Varia Rumengol*

Bezit ato Remed-holl.

1. Itron Varia ar Porzou, — pedit evidomp da eur hor maro.

AN HOLL. — *Itron Varia ar Porzou*

Digorit d'eomp an Nenvou.

2. Itron Varia Ti-Mamm-Doue, — bezit hor Mamm bepred.

AN HOLL. — *Itron Varia Ti-Mamm-Doue,*

Hon diwallit noz ha de.

1. Rouanez hor bro, — diwallit hor prizonerien, — hon tud hag a labour e pell-bro a viliadou, — pellait diouto pep droug.

2. Eun dervez, hep dale, fizians hon eus, — e vezo gwelet en ho chapeliou, — hag e Lourd, en hini vrudeta, — tud o pedi, — tud o lavarout d'eoc'h o anaoudegez vat.

1. Mestrez ar peoc'h, d'ho pugale,

Roit buan peoc'h Doue.

2. Rouanez Frans, Itron Varia,

Gwelit ho pro din a druez ;

Hastit ato sikour ho merc'h hena

Hag e sayo leun a vuhez.

1. Rouanez Vreiz, — diwallit diouz dismantr ar brezel,

Hor c'hêriou, hor maeziou, — hon ilizou santel.

AN HOLL. — *Evelse-bezet graet.*

(Eun dizenez-chapeled.)

Setu an amzer nevez

1. Kanaouenn hor yaouankiz a sav bepred,

Evel ar maged, 'trezek an nenv a sked.

Eur c'helou 'zo skignet,

An holl 'deus e glevet :

'Vit an amzer da zont

Holl war sao hag hep spont.

Labourer gwasket gant ho trubuilhou bemdez,

Emgleviou kristen 'zegas d'eoc'h levenez.

DISKAN :

'Vit an holl levezet
Set' an amzer nevez
Ni 'labouro bepred
'Vit ar C'hrist, mestr ar bed.

2. An tri *Angelus* o sevel eus an tour
'C'halv ar c'hristen d'e labour gant eur vouez flour ;
Ha d'an nenv da Jezuz
'Gas eur bedenn nerzus ;
Doue a-raok pep tra
Rak an aour n'eo netra !
'Vit ma vo eürusted en hon tiegeziou
Eur feiz birvidik 'rank bleunia er c'halonou.
3. 'Vel-se justis, madelez 'reno ervat
Bemdez en hor buhez, 'n hon deveriou a stad,
Hag el labour tenna
Koulz hag en distera
E kanimp holl, hep nec'h,
Alléluia an trec'h.
Moueziou unanet labourerien ar maeziou
A vo ken nerzus ma kreno bolz an nenvou.

BENNOZ AR SAKRAMANT

Ave verum.

PEDENN

1. Salver Jezuz, — c'houi eo ar rezureksion hag ar vuhez.
AN HOLL. — *Salver Jezuz, — ni gred ar wirionez-man.*
2. An hini a gred ennoc'h, — a vevo da viken.
AN HOLL. — *Hon esperans, hor fizians eo.*
1. Salver Jezuz, — hor bro a zo bet gloazet. — Roit d'ezi ar
pare.
AN HOLL. — *Salver Jezuz, — hor bro a zo bet gloazet. — Roit
d'ezi ar pare.*
2. E-kreiz hor poaniou — e savomp hor mouez da c'houlenn
pardon.
AN HOLL. — *E-kreiz hor poaniou — e savomp hor mouez da
c'houlenn pardon.*
1. Ma kavomp eo kalet an dorn a zeu d'hor skei, — ni oar
n'eus nemet karantez evidomp — en ho kalon.
AN HOLL. — *Ni oar n'eus nemet karantez evidomp — en ho
kalon.*
2. Roit d'eomp ar c'hras da blega d'ho polontez.
AN HOLL. — *Roit d'eomp ar c'hras da blega d'ho polontez.*

1. Grit ma kendalc'himp da gaout fizians — en despet da bep
tra.

AN HOLL. — *Grit ma kendalc'himp da gaout fizians — en des-
pet da bep tra.*

2. Grit ma savo, eun deiz, hor bro, — uheloc'h eget biskoaz.

AN HOLL. — *Grit ma savo, eun deiz, hor bro, — uheloc'h eget
biskoaz.*

*

1. Salvez Jezuz, Doue leun a drugarez,
Roit d'hor bro eur vuhez nevez.

AN HOLL. — *Salver Jezuz, Doue leun a drugarez,
Roit d'hor bro eur vuhez nevez.*

*Goude bennoz ar sakramant, kana adarre eur c'houlad eus
Kantig ar Werc'hez : « Mamm Jezuz hor mamm », pe eus ar c'han
all : « Setu an amzer nevez ».*

E gwerz e : Direction des Œuvres, rue Feunteunig-ar-Lez,
Quimper.

AOTRE DA VOULA :

Kemper, 25 a viz C'hovevrer 1944.

A. MOENNER, Vikel oras.

Ti-moulerer Bro-Gerne, 7, ru ar Dudchentil, Kemper.

GOULENNIT C'HOAZ DIGANEOMP :

Pedomp.

Kanomp.

Kanomp c'hoaz.

C'hoariomp.

Rozera al' labour.

Pedenn an dud diwar ar maez.

Gwazed a-zoare.

Eur Gwaz e rankez dont da veza.

E servij ar vro.

War an daoulin evit ar vro.

Gloar da Vari.
